

Merer Guillaume. (Lokireg 1843 – Montroulez 1890)

Chanson nevez kompozet d'ar gwazed yaouank, kanton Lanneur

Eur bern gerioù galleg a zo e-barz ar skrid-se. Adskrivet int bet evel pa vefent brezoneg. Traou 'zo a zo diêz da gompren.

War eun ton galleg.

Me ho supli, Gwerhez gloriuz Vari, hag he mab benniget,
Diganeoh e houlenan sklêrijenn d'am spered,
Ma hellfet rei din ar pouvoar hag ivez ar buisañs
Evel m'en-devoa sant Louis pa oa roue er Frañs.

Em-ije implijet va amzer da zoned da rima,
Sklêrijenn d'am daoulagad ma teuin da skriva,
Selaouit a galon sperejou a zo parfet,
Entrezoh, tud yaouank, ne vefet ket daleet.

Me ho supli, Bretoned, prestig hoh intañsion
Da gleved kana eur himiad truezuz a doucho he halon,
Eur himiad leun a hlahar, deuz an truezusa,
'Zo kompozet a-nevez evid ar bloaz-ma'.

Deuz a-berz or mestrou 'z eo deut ar gomandamant
Da denna d'ar billed¹ evid ar bloavez prezant,
'Barz er bloaz mil eiz-kant ha tri-ugent,
D'ar seiteg a viz C'hwevrer, 'vid rei deoh da entent.

War-dro kreisteiz hanter pe eun eur d'an hirra,
'Oa sonet an daboulin dezo d'en em renta ;
En em renta a ra ar baotred yaouank e Lanneur prontamant,
Pa rankont akomplisa dezign ar gouarnamant.

D'ar seiteg a viz C'hwevrer a zo tremenet
Ar baotred yaouank o-deus tennet ar billed.
Kuitaad a rankont ha mond er-mêz ar vro,
A ! Doue o honduo el leh ma teziro.

Tud yaouank deuz an arme deuz ar re derrupla,
Glaharet eo o lignez p'o gwelont o partia,
Da bartial er-mêz o bro da vond gand an nasion,
Emañ beuzet a zaelou o zud gand an dezolasion.

Kriz 'vije ar galon da ouela ma ne deuje
E-barz en kanton Lanneur bremañ neb a vije
O weled an dud yaouank, o lignez beuzet a hlahar,

¹ Da denna d'ar billed : evid mond d'an arme, d'ober o hoñje.

An daelou en o daoulagad o hlebia an douar.

Pa oant bet galvet 'vid doned da denna
E komañsas o oll izili da zoned da grena,
Kement-se 'oa eur skwer e rankjent mond d'an arme.
Skuilla 'ra daelou o daoulagad ha ne reont ket hep sujet.

Me a zisklêrio deoh beteg fin ar breuvenn
Ar glahar a zo bremañ e-touesk ar Frañsijen
War ar sujet demeuz ar revolution,
E rankont kuitaad da vond gand an nasion.

An dud ansienna a zo war bed-mañ
N'o-deus ket gwelet biskoaz ar pezh a zo bremañ,
E rankay ar wazed-gard mobilizet kuitaad o bro ;
Me a gred e vezo mantret-oll kement a glevo.

Kriz 'vije ar galon ma ne deu da ouela,
O kleved aneze deuz en em gimiada,
Ar gard mobilizet, leun a velañkoni,
Pa'h eont deuz ar Brusianed da gombati.

An amzer evuruzamant a ya da veza tremenet,
Va halon 'zo langisant pa'h eom-ni da veza separet,
Amzer ha laouenidigez a rankom eta dilezel,
Bemañ ez om leun a dristidigez o kuitaad Breiz-Izel.

Deut eo ar Brusianed war douar ar Frañsijen,
Ha ni a guita or bro gand glahar hag anken,
Goude lakaad 'n on flas d'ober servij ar gouarnamant
E rankom ho tilezel ha mond war-lerh on arhant.

O zud hag o lignez 'zo komañset da ouela
O kleved aneze deuz en em gimiadi,
O pronoñs ar gwir e rankjent en em guitaad.
O ! kement o hlevo o-devezo kalonad.

Tadou ha mammou hag o lignez 'zo dezolet,
Breudeur ha c'hoarezed 'zo glaharet,
Hag on halonou en on hreiz a zo kazi rannet
Pa rankom kuitaad ar re o-deus on maget.

Kenavo, tadou ha mammou, pa rankom kuitaad
Hag or breudeur ha c'hoarezed tener ha mad,
Kerent hag anaoudegezed, gand eur galon hlaharet,
Pa rankom kuitaad 'vid mond d'ar Brusianed.

Tadou ha mammou a lavar d'o bugale :
« Deut c'hoaz d'on ambrasi ken ma'h eet d'an arme.
Deut c'hoaz etre on divreh eur wech kent eged mervel,

Ni 'mom ket an avañtaj pa rankom ho tilezel. »

Mond a reont an eil hag egile 'vid ar wech diweza,
An daelou en o daoulagad a deu da izella.
An daelou a deu da izella deuz o daoulagad,
Ha kement a glevje 'nije glahar ha kaonad.

O zadou dezolet a lavar en eur ouela :
« Aotrou Doue, va bugale gêz bremañ rank partia,
Bremañ 'z eo red on abandoni ha mond deuz ar gêr,
Ne chomfet ganem d'or zoulaji en on mizer.

Or halonou 'zo fraillet dre nerz ho huanadennou,
Hag on daoulagad 'zo beuzet en eur mor a zaelou.
Allaz ! deut eo an devez ma ranket or huitaad,
Ha kement ho kleo amañ 'devo sur kalonad.

Ma ne deuet ket da weled ar gard mobilizet,
Ni a gred ez oh kruelloh eged an diranted,
Ar re², gwechall, o-devoa bet ar gruelled
Da lakaad d'ar maro or Zalver benniget.

« Red eo eta, kerent ha mignoned, en em zepari,
Pa n'e-meum ket ar boneur d'ho souten en ho kozni,
Al lezenn 'zo didruez ha deut eo an ordrenañs
Ma rankom ho kuitaad hag heuill trouplou Frañs.

Kenavo, oll beredou ha douarou benniget
En peleh e moam design da veza interet.
Da ouel an Anaon klemmuz ne deuim mui war ho peziou
Da skuilla an dour benniget gand kalz a gañvou.

Kerent hag anaoudegezed, on design a zo braz.
Ni 'garfe beza desedet bremañ en ho plas.
Kerkoulz m'hen fond³ badiziant, karnel on zud koz,
Gras deom d'en em weled en gloar ar Baradoz. »

Ha daelou ho taoulagad a hlebia ar vein bez.
Kalz a dud euz ho kweled gand glahar a ouele
O weled ar gard mobilizet oh ober o himiad.
Ha marteze hen reont, aliez siwaz ! evid mad.

« Kenavo, beleien hoh-eus on badezet, hag an oll dud a Iliz,
Ar mêr hag adjoiñt, membrou deuz an dud a justis,
Ha d'an dud añsian, a deh toud kement o mem karet,
Ha da ganton Lanneur ha d'e oll habitanted.

Pa'z eo deut al lezenn deuz a-berz ministr ar brezel,

² Ar re : Pere, er skrid orin.

³ m'hen fond : ?

E rankom ho kuitaad pa oar deut d'or gervel
Da voned d'o divenn euz an oll enemied
O-deus c'hoant da egzersi warnom o hrueled. »

« Tavet, tavet, va breudeur ha na ouelit ket.
Tachit d'en em gonsoli, en em gonformi 'zo red.
Enterzoh, gwersed yaouank, bevet en esperañs,
Doue, tad a vezerikord, a zo braz e brovidañs.

Goude ma vo fin d'ar brezel ha gounezet ar vektor,
Gadn gras Doue hag ar Werhez, 'vo fin d'or glahar.
Gand merk deuz ho vaillantiz, gand kalz euz a enoriou,
E teufet d'ar gêr 'vid seha piz on daelou.

Med ne esperit ket va foan en deizioù da zoned,
Da unisa an overennou evidoh soudarded
'Vid ma peh chañs ha boneur da retorn war ho kiz
Gand eun drapo loreet gand merk ar vaillantiz. »

Setu ar gard mobilizet konsolet a gomzou charmant,
Hg a lavar an eil d'egile gand eur galon gontant :
« Entrezom, breudeur yaouank dem, eo gand an arme
Da zikour kerent ha mignoned 'zo en dañjer o buhe'.

Me ho supli, tadou ha mammou, kent ho kuitaad,
Ha breudeur ha c'hoarezed tener ha mad,
Kaoud soñj da bedi Doue hag ar Werhez evidom
Hag on Êlez vad o-devo soñj ahanom.

Breudeur ha c'hoarezed, pa chomet gante er vro,
Bezef soagn euz on zud beteg eur ar maro.
Meur a wech ganeom o-deus bet veillet,
Ha daelou o daoulagad o-deus glebiet an oaled.

Bremañ pa'z om memproù da Jezuz, soudarded an Aviel,
Bugale da Zoue on Tad, memproù d'ar Spered Santel,
Entrezom, breudeur ha kerent deom, gand enor ha respet,
Deom d'an Iliz a Gernitron⁴ gand eur galon barfet. »

En iliz Kernitron en em brosternehont d'an daoulin
Dirag ar Werhez gloriuz Vari hag he mab divin.
Juntret gante o daouarn, digor o daoulagad,
O selled 'trezeg an Neñv da houlenn ar mennad.

« Gwir vab d'an Tad Eternel, or Salver adorabl,
Ni 'deu d'hoh adori ebtege ho Tabernakl.
Diskennet, mar plij ganeoh, warnom eur zell a drue'
'Vid ma meum chañs ha boneur da zistrei deuz an arme.

⁴ Gernitron E Lanneru ema iliz Ker-'n Itron.

Drinded santel, prosternet dirazoh d'an daoulin,
Me ho supli da rei sikour d'ho servijerien iñdign.
Va spered 'zo frajil ha va studi 'zo izel,
Sklêrijenn a houlenan ouzoh, Drindell santel.

Gwerhez gloriuz Vari, deoh en em adresan,
Obtenit deom ar grasou da halloud rezista,
Deom ha d'on breudeur pa vefom er gombat,
'Vid ma vefom prezervet deuz an tan hag ar gwad.

Diouzoh, Sent ha Sentezed, ne guitaom ket⁵,
Esperañs e-meom e vefet dem alvokaded,
Deom ha d'on breudeur pa vefom er broiou estrañjour,
Prestit deom, me ho supli, prestit deom ho sikour.

Evid ma welfom an tañbour-major, e kanen gantañ en êr
O krial war ar zoudarded vaillant : « Kit bremañ d'ar gêr. »
Neuze e tistrofomd'ar gêr gand kalz a joausted,
Kerent ha mignoned 'vezo toud raviset. »

Reketom eta da gement 'zo desedet
Eh afent da repoz en gloar an evrusted,
Gras deom d'en em weled er palez selestiel.
En ano an Tad, ar Mab hag ar Spered Santel.

Entrezoh azistanted, ho-peus c'hoant da gleved
Piou 'n-eus chañson ar himiad kompozet.
Eur peizant yaouank, genidig a barrez Lokireg,
E ano Guillaume Merer, 'zo dister a spered.

⁵ ne guitaom ket : Er skrid orin : "ne guiniad eomp ket" : ?

Me ho supli, Bretoned, prestig hoh intañsion
Da gleved kana eur himiad truezuz a doucho he halon,
Eur himiad leun a hlahar, deuz an truezusa,
'Zo kompozet a-nevez evid ar bloaz-ma'.

Deuz a-berz or mestrou 'z eo deut ar gomandamant
Da denna d'ar billed⁶ evid ar bloavez prezant,
'Barz er bloaz mil eiz-kant ha tri-ugent,
D'ar seiteg a viz C'hwevrer, 'vid rei deoh da entent.

War-dro kreisteiz hanter pe eun eur d'an hirra,
'Oa sonet an daboulin dezo d'en em renta ;
En em renta a ra ar baotred yaouank e Lanneur prontamant,
Pa rankont akomplisa dezign ar gouarnamant.

D'ar seiteg a viz C'hwevrer a zo tremenet
Ar baotred yaouank o-deus tennet ar billed.
Kuitaad a rankont ha mond er-mêz ar vro,
A ! Doue o honduo el leh ma teziro.

Tud yaouank deuz an arme deuz ar re derrupla,
Glaharet eo o lignez p'o gwelont o partia,
Da bartial er-mêz o bro da vond gand an nasion,
Emañ beuzet a zaelou o zud gand an dezolasion.

Kriz 'vije ar galon da ouela ma ne deuje
E-barz en kanton Lanneur bremañ neb a vije
O weled an dud yaouank, o lignez beuzet a hlahar,
An daelou en o daoulagad o hlebia an douar.

Pa oant bet galvet 'vid doned da denna
E komañsas o oll izili da zoned da grena,
Kement-se 'oa eur skwer e rankjent mond d'an arme.
Skuilla 'ra daelou o daoulagad ha ne reont ket hep sujet.

Me a zisklêrio deoh beteg fin ar breuvenn
Ar glahar a zo bremañ e-touesk ar Frañsijen
War ar sujet demeuz ar revolusion,
E rankont kuitaad da vond gand an nasion.

An dud ansienna a zo war bed-mañ
N'o-deus ket gwelet biskoaz ar pezh a zo bremañ,
E rankay ar wazed-gard mobilizet kuitaad o bro ;
Me a gred e vezo mantret-oll kement a glevo.

Kriz 'vije ar galon ma ne deu da ouela,
O kleved aneze deuz en em gimada,
Ar gard mobilizet, leun a velañkoni,

⁶ Da denna d'ar billed : evid mond d'an arme, d'ober o hoñje.

Pa'h eont deuz ar Brusianed da gombati.

An amzer evuruzamant a ya da veza tremenet,
Va halon 'zo langisant pa'h eom-ni da veza separet,
Amzer ha laouenidigez a rankom eta dilezel,
Bemañ ez om leun a dristidigez o kuitaad Breiz-Izel.

Deut eo ar Brusianed war douar ar Frañsijen,
Ha ni a guita or bro gand glahar hag anken,
Goude lakaad 'n on flas d'ober servij ar gouarnamant
E rankom ho tilezel ha mond war-lerh on arhant.

O zud hag o lignez 'zo komañset da ouela
O kleved aneze deuz en em gimidi,
O pronoñs ar gwir e rankjent en em guitaad.
O ! kement o hlevo o-devezo kalonad.

Tadou ha mammou hag o lignez 'zo dezolet,
Breudeur ha c'hoarezed 'zo glaharet,
Hag on halonou en on hreiz a zo kazi rannet
Pa rankom kuitaad ar re o-deus on maget.

Kenavo, tadou ha mammou, pa rankom kuitaad
Hag or breudeur ha c'hoarezed tener ha mad,
Kerent hag anaoudegezed, gand eur galon hlaharet,
Pa rankom kuitaad 'vid mond d'ar Brusianed.

Tadou ha mammou a lavar d'o bugale :
« Deut c'hoaz d'on ambrasi ken ma'h eet d'an arme.
Deut c'hoaz etre on divreh eur wech kent eged mervel,
Ni 'mom ket an avañtaj pa rankom ho tilezel. »

Mond a reont an eil hag egile 'vid ar wech diweza,
An daelou en o daoulagad a deu da izella.
An daelou a deu da izella deuz o daoulagad,
Ha kement a glevje 'nije glahar ha kaonad.

O zadou dezolet a lavar en eur ouela :
« Aotrou Doue, va bugale gêz bremañ rank partia,
Bremañ 'z eo red on abandoni ha mond deuz ar gêr,
Ne chomfet ganem d'or zoulaji en on mizer.

Or halonou 'zo fraillet dre nerz ho huanadennou,
Hag on daoulagad 'zo beuzet en eur mor a zaelou.
Allaz ! deut eo an devez ma ranket or huitaad,
Ha kement ho kleo amañ 'devo sur kalonad.

Ma ne deuet ket da weled ar gard mobilizet,
Ni a gred ez oh kruelloh eged an diranted,

Ar re⁷, gwechall, o-devoa bet ar gruelded
Da lakaad d'ar maro or Zalver benniget.

« Red eo eta, kerent ha mignoned, en em zepari,
Pa n'e-meum ket ar boneur d'ho souten en ho kozni,
Al lezenn 'zo didruez ha deut eo an ordrenañs
Ma rankom ho kuitaad hag heuill trouplou Frañs.

Kenavo, oll beredou ha douarou benniget
En peleh e moam design da veza interet.
Da ouel an Anaon klemmuz ne deuim mui war ho peziou
Da skuilla an dour benniget gand kalz a gañvou.

Kerent hag anaoudegezed, on design a zo braz.
Ni 'garfe beza desedet bremañ en ho plas.
Kerkoulz m'hen fond⁸ badiziant, karnel on zud koz,
Gras deom d'en em weled en gloar ar Baradoz. »

Ha daelou ho taoulagad a hlebia ar vein bez.
Kalz a dud euz ho kweled gand glahar a ouele
O weled ar gard mobilizet oh ober o himiad.
Ha marteze hen reont, aliez siwaz ! evid mad.

« Kenavo, beleien hoh-eus on badezet, hag an oll dud a Iliz,
Ar mêt hag adjoiñt, membrou deuz an dud a justis,
Ha d'an dud añsian, a deh toud kement o mem karet,
Ha da ganton Lanneur ha d'e oll habitanted.

Pa'z eo deut al lezenn deuz a-berz ministr ar brezel,
E rankom ho kuitaad pa oar deut d'or gervel
Da voned d'o divenn euz an oll enemied
O-deus c'hoant da egzersi warnom o hrueled. »

« Tavet, tavet, va breudeur ha na ouelit ket.
Tachit d'en em gonsoli, en em gonformi 'zo red.
Enterzoh, gwersed yaouank, bevet en esperañs,
Doue, tad a vezerikord, a zo braz e brovidañs.

Goude ma vo fin d'ar brezel ha gounezet ar viktor,
Gadn gras Doue hag ar Werhez, 'vo fin d'or glahar.
Gand merk deuz ho vaillantiz, gand kalz euz a enoriou,
E teufet d'ar gêr 'vid seha piz on daelou.

Med ne esperit ket va foan en deziou da zoned,
Da unisa an overennou evidoh soudarded
'Vid ma peh chañs ha boneur da retorn war ho kiz
Gand eun drapo loreet gand merk ar vaillantiz. »

⁷ Ar re : Pere, er skrid orin.

⁸ m'hen fond : ?

Setu ar gard mobilizet konsolet a gomzou charmant,
Hg a lavar an eil d'egile gand eur galon gontant :
« Entrezom, breudeur yaouank dem, eo gand an arme
Da zikour kerent ha mignoned 'zo en dañjer o buhe'.

Me ho supli, tadou ha mammou, kent ho kuitaad,
Ha breudeur ha c'hoarezed tener ha mad,
Kaoud soñj da bedi Doue hag ar Werhez evidom
Hag on Êlez vad o-devo soñj ahanom.

Breudeur ha c'hoarezed, pa chomet gante er vro,
Bezef soagn euz on zud beteg eur ar maro.
Meur a wech ganeom o-deus bet veillet,
Ha daelou o daoulagad o-deus glebiet an oaled.

Bremañ pa'z om memprou da Jezuz, soudarded an Aviel,
Bugale da Zoue on Tad, memprou d'ar Spered Santel,
Entrezom, breudeur ha kerent deom, gand enor ha respet,
Deom d'an Iliz a Gernitron⁹ gand eur galon barfet. »

En iliz Kernitron en em brosternehont d'an daoulin
Dirag ar Werhez gloriuz Vari hag he mab divin.
Juntret gante o daouarn, digor o daoulagad,
O selled 'trezeg an Neñv da houlenn ar mennad.

« Gwir vab d'an Tad Eternel, or Salver adorabl,
Ni 'deu d'hoh adori ebtege ho Tabernakl.
Diskennet, mar plij ganeoh, warnom eur zell a drue'
'Vid ma meum chañs ha boneur da zistrei deuz an arme.

Drinded santel, prosternet dirazoh d'an daoulin,
Me ho supli da rei sikour d'ho servijerien iñdign.
Va spered 'zo frajil ha va studi 'zo izel,
Sklêrijenn a houlennan ouzoh, Drindell santel.

Gwerhez gloriuz Vari, deoh en em adresan,
Obtenit deom ar grasou da halloud rezista,
Deom ha d'on breudeur pa vefom er gombat,
'Vid ma vefom prezervet deuz an tan hag ar gwad.

Diouzoh, Sent ha Sentezed, ne guitaom ket¹⁰,
Esperañs e-meom e vefet dem alvokaded,
Deom ha d'on breudeur pa vefom er broiou estrañjour,
Prestit deom, me ho supli, prestit deom ho sikour.

Evid ma welfom an tañbour-major, e kanen gantañ en êr
O krial war ar zoudarded vaillant : « Kit bremañ d'ar gêr. »
Neuze e tistrofomd'ar gêr gand kalz a joausted,

⁹ Gernitron E Lanneru ema iliz Ker-'n Itron.

¹⁰ ne guitaom ket : Er skrid orin : "ne guiniad eomp ket" : ?

Kerent ha mignoned 'vezo toud raviset. »

Reketom eta da gement 'zo desedet
Eh afent da repoz en gloar an evrusted,
Gras deom d'en em weled er palez selestiel.
En ano an Tad, ar Mab hag ar Spered Santel.

Entrezoh azistanted, ho-peus c'hoant da gleved
Piou 'n-eus chañson ar himiad kompozet.
Eur peizant yaouank, genidig a barrez Lokireg,
E ano Guillaume Merer, 'zo dister a spered.